

KIS-578 – Gl. identique, différent, h.a. er Jedoniezh, er gedvuhez, er Brederouriezh

(YBAN da GE – 03 05 98)

Er Gevosodouriezh e kaver an termenoù gallek-mañ arveret a bep eil, en un doare damgevatal : *distinct, différent* hag an termenoù kontrol : *identique, égal*. An alamaneg a ra gant *verschieden ≠ gleich* en un doare ingal. Te da-unan a ra gant Br. *diforc'h* e'z GSTL., enmoned **COMBINATOIRE** : “ergorennoù diforc'h pe get, logoù diforc'h pe get”. Dres penaos e rafes evit ar c'hontrol eus an *diforc'h-se* ? Hogen e La-10 e'c'h eus merket splann an diaesterioù a save gant arver ar Br. *diforc'h, disheñvel*... Setu perak e'm eus degaset da'z heul Br. *anpar*, kontrol da *par*. Evel a lavar Stella BARUK tu bennak : “*distinct = pas égal*”. Er Jedoniezh ez eo *par* un ergoren dezhi he unan ha pik echu. Kement-se zo bet diskoulmet. Div ergoren zo *anpar* dre dermenadur, anez ne ve ket lavaret “div”, nemet a-wechoù e vez pouezet dre c'hourleizh, pe evit ma ve fraeshoc'h.

Pezh a laz er Gevosodouriezh eo e ve Br. *digemmadus*, Gl. *discernable* an ergorennoù-mañ ergorennoù, pe Br. *andigemmadus*, Gl. *indiscernable*. Pezh zo diaes en diskiblezh-mañ eo e vez roet alies skouerioù a venner “louer”, alese arver touellus ar yezh voutin : *diforc'h, disheñvel*, hag all. E galleg e lavarar, da skouer : “*des éléments identiques*” evit boullou n'int nemet “*peurheñvel*” ha pelloc'h e vo graet anv eus ul liesac'h enni “*des éléments identiques*”, pa dalvez amañ “*identique*” kement ha “par”, eleze pa vez an un elfenn o revout lies gwech, o liesrevout. Ha c'hoazh e vo kel a “*résultats différents*”, eleze an disoc'hoù **bezus**, rak ne zeufe morse e penn un den reiñ div pe deir gwech an un disoc'h ! A drugarez Doue ne sav al liesañ amjstregezh ebet e galleg, nag en alamaneg a-du-rall, hogen stadet 'm eus meur a wech e veze treuzkomprenet dezrevelloù 'zo gant ar skolidi, da skouer e troiennoù evel “*deux à deux distincts*”. Mard eus elfennoù en un teskad ez int “*distincts*”, anez ne vijent ket elfennoù diouto o-unan ! Un afer all eo lavarout e unrevezont pe get. Lakaomp ur bempac'h (*a, a, b, b, a*). Lavarout a ran ez eo amparet gant div elfenn anpar *a* ha *b*, *a* o revout teir gwech ha *b* div wech. *Diforc'h* (termen eus ar yezh voutin) eo pep kedrann avat, pa'z eus dres pep kedrann. Un dra all eo lavarout o deus kedrannoù 'zo gwerzhadoù **par** !

Evidon-me a ra dave d'un dra resis : un ergorenn zo **par** dezhi he unan, an **un** ergorenn eo. Div ergorenn zo **anpar**, ma n'int ket an un ergorenn. Asantiñ a ran – ouzh ar vevenn – lavarout ez eo **par** div reveziadenn eus an un elfenn pe ergorenn, dre ledanviñ evit *par o gwerzhadoù*. Gwell e kavan ober gant :

1° **digemmadus** hag **andigemmadus** evit an ergorenoù loc'hañ.

2° **revout**, **reveziadenn** evit a sell bezañs” un elfenn en un disoc'h, un amprouad. Ma ne revez nemet ur wech e vo lavaret ez eo Br. **unreveziat**. Mar revez div, teir, peder... gwech, e vo **daoureveziat**, **trireveziat**, **perreveziat**, **pemreveziat**, **c'hwereveziat**..., **liesreveziat**. Soñjal ivez e Br. **liesrevout**. En doare-se e vo hepkoret an troiennoù evel Gl. “*deux éléments distincts deux à deux*” ha me oar-me. A-se e ve Br. **unrevout** Gl. *apparaître, figurer une fois*, hag all. Neuze un arenkad gant arreadoù evel (A, A, B, A) zo un arenkad gant **liesreveziadoù**, un **arenkad liesreveziadel** (mar bez ret ober gant an termen-mañ !)

3° Evit an disoc'hoù, pa'z int ergorenoù jedoniell evel teskadoù pe liesac'hoù, e vo arveret Br. **par**, Br. **anpar**, pa ra ar galleg gant *identique, distinct, différent*. Alies e vez stambouc'h er frazennoù gallek eus ar stil : “*combien y a-t-il de résultats différents ?*”. E brezhoneg e c'haller mat-tre ober gant : “**pet disoc'h (bezus) zo en holl ?**”

4° Br. **diforc'h** a arverfen gant evezh bras hag an nebeutañ gwellañ. A-du-rall, al levrioù gallek a live uhel a ra nebeut kenan gant *distinct* ha tutti quanti.

SKOUER — En un arc'h ez eus teir boull ruz ha div voull wenn. An teir ruz zo andigemmadus, evel an div wenn a-du-rall. Hogen gallout a reer ivez lavarout ez int andigemmadus o femp d'ar stekiñ, mar tenner unan dre zargouezh eus an arc'h.

Empentomp bremañ un arnod dargouezhel (anvet ivez amprou dargouezhel) despizet gant ar c'homenad da heul :

Tennañ dre zargouezh ur voull eus an arc'h ha merkañ al liv. Goude se tennañ un eil ha merkañ he liv war-lerc'h.”

Anat hor bo da zisoc'hoù (pe damgevatal : da *amprouad*, eleze ez eo an *amprou* an arnod hag an *amprouad* an disoc'h) daouac'hoù evel :

(R, G), (R, R), (G, G), (G, R)

Ar galleg a lavar en degouezh-mañ : “*un couple d’éléments distincts*” hag ivez “*des éléments pouvant apparaître plusieurs fois*” pe “*des cases occupées par des éléments différents*” pe c'hoazh e kudennoù all : “*dans ce n-uplet figurent p éléments distincts les uns des autres*”, “*les éléments ne sont pas tous distincts, certains apparaissent plusieurs fois*”, “*on obtient des couples différents, distincts*”, “*on obtient 6 couples (R, G) identiques*”.

Mar fell dimp eriñvañ an holl zaouac'hoù bezus evel disoc'h d'an arnod e c'haller jedoniaat ar gudenn dre ibiliañ pep boull : $\{R_1, R_2, R_3, G_1, G_2\}$. Ar menegoù-se a ro tu dimp d'o digemmañ ha da sevel ur wezenn. Goût a ouzer ez eus A_5^2 arenkad hep arread diwar ar pemp elfenn digemmadus-se :

$$\Omega = \left\{ \begin{array}{l} R_1R_2, R_1R_3, R_2R_1, R_2R_3, R_3R_1, R_3R_2, \\ R_1G_1, R_1G_2, R_2G_1, R_2G_2, R_3G_1, R_3G_2, \\ G_1R_1, G_1R_2, G_1R_3, G_2R_1, G_2R_2, G_2R_3, \\ G_1G_2, G_2G_1 \end{array} \right\} \text{teskad a r bezusterioù } , \\ G_1 . \text{ univers des possibles}$$

An ugent daouac'h-se zo **anpar daou ha daou**, met kenkoulz lavarout ez int **unreveziat**.

Bremañ, mar diverker ar menegoù hor bo 6 RR, 6 RG, 6 GR ha 2 GG. Moarvat ne vo ket ur sotoni skrivañ : bez' ez eus 6 daouac'h (R, R) **par** (pa'z eo par o c'hedrannoù), met kenkoulz lavarout e **revez 6 gwech** pe ez eo **c'hwereveziat**. Merzhout mat un dra : ul lamm ez eus eus ar c'hantouezadoù d'ar Jedoniezh : en arc'h ez eus boulloù louet, tra ma'z eo (R, G) un daouac'h. Ur stroll div voull urzhiet ned eo ket “par” d'ur stroll all, “anpar” naket. Moarvat e c'haller evit strolloù boulloù louet ober gant termenoù all, hogen pere ? Penaos e vo lavaret evit ar strolloù urzhiet (boull ruz, boull wenn) ha (boull wenn, boull wenn) da skouer ? *Diforc'h* e vefent ? Ya, met (boull ruz, boull wenn) ha (boull ruz, boull wenn) a c'hell mat-tre bezañ daou stroll boulloù amparet gant boulloù “diforc'h” ha neuze ez int “diforc'h” ivez ! Ac'hanta ! Lavarout hon eus 20 stroll boulloù diouto o unan da zisoc'hoù bezus d'hon arnod dargouezhel (eleze ez eus e gwir 20 stroll div voull, ha n'eo ket unan muioc'h pe unan nebeutoc'h), ha n'eo ket ober stad eus ur skalfad 20 disoc'h o forc'hañ an eil diouzh egile dre natur ar boulloù (ha n'eo ket o liv hepken) pe urzh ar boulloù ? A se ez eus da vat 20 disoc'h diforc'h, reoù 'zo o vezañ “peurheñvel” diouzh ur gwel, ha reoù all “disheñvel”. Pezh zo kasaus eo e tiverker al lamm etre domani ar Jedoniezh ha hini al louet, ar c'hantouezañ, dre ober gant ur yezh laosk. Evidon a glasko merkañ mat an

disparti etrezo. Moarvat e vankin ivez da'm reolenn bep ar mare, gant ar spi e chomo bepred fraezh va frepoz...

Un dra all zo gant va c'hinnig **reveziat, unreveziat... , liesreveziat** : hepkoriñ ar gwered klañvdi gant *par, anpar, hebar, ampar*, ma n'eo ket *amparañ* !

Ur gudennig : penaos lavarout ne revez ket un ergorenn : dre veztrac'h diwar *ezrevout, ezreveziat* ha ne vefe ket gwell *ezvout, ezveziat*, pa'z eus endeo □ arouez an *ezveziadezh* ?

SKOUER — Gl. “*pour trouver le nombre des nombres de quatre chiffres différents*”, Br. “*evit erañvañ an niveroù kevan peder sifrenn unreveziat*” pe “[...] *peder sifrenn anpar ?*” Ar galleg a lavar alies e seurt degouezh : “*différents deux à deux*”. Ha n'eo ket fraeshoc'h “*peder sifrenn unreveziat*” eget “*peder sifrenn anpar ?*” Dreist holl mar bez goulennet erañvañ an niveroù *hebar* Gl. *pairs* !

(GE da YBAN — 12 05 98)

N'eo ket fraezh din pep tra e'z notenn a-zivout *par*, h.a. Te a lavar n'eus ket amjstregezh (evit ar jedoniourion) nemet e treuzkompren skolidi dezrevelloù 'zo. Anzav a ran bezañ e tu ar skolidi en degouezh.

A-zivout Br. *par* end-eeun. Evel a lavarez, ez eo re sammet p'en adkaver e *hebar-ampar, e par, amparañ* : diaes e ve e sammañ muioc'h ha dreist-holl e lakaat da zec'heriañ keñverioù jedoniell disheñvel : diouzh un tu : *tri mui daou zo par da bemp*”, diouzh an tu all : “*par* eo un ergorenn dezhi he unan ha pik echu”. Er frazenn gentañ e pledfed gant kementadoù hepken, en eil e vukfed ouzh un dremmwel kalz klokoc'h pa lakfed e penn kont n'eo ket kementadoù hepken, met elfennoù, eleze hiniennoù. Gant gerioù all, un elfenn *zo par* dezhi he unan ne dalvez ket hepken “he c'hementad *zo par* d'he c'hementad”, met *an un* hinienn eo ganti he unan. Gwall veskus e hañval din reiñ un hevelep dec'heriad da zaou geal ken nes ha ken pell war un dro.

Pezh a gavan diziouerus, n'eo ket hepken diouzh savboent ar prederour, met ivez diouzh hini ar skoliad deboner (ma n'eo ket sur e ven hennezh, ez on hemañ hep ket a var !), eo despizañ pezh a ran anezhañ a-zioc'h an “dremmwel” ma tispaker ar prezeg. Mar loc'han diouzh ar pezh a anavezan, ez intentan kealioù ar Jedoniezh evel o tisoc'h diouzh lankadoù goubarañ. Ul louet zo loet en egor hag en amzer ; n'eo ket forzh pe re : en egor hag en amzer ar bed ma hanvezomp ; hiniennoù omp ha kediñ a reomp hinienned er bed.

Kentañ goubarañ eo lakaat hon hanvout etre krommelloù : diwar an *epochv*-se, gin da hini HUSSERL, ez a ar bed da alvez, an egor hag an amzer hanvoudel (a lavarfed c'hoazh : buhezel, denel..., a lavaran : loue da heul SARTRE) da egor-amzer alvezel ; an hinienned avat a steuz pe, kentoc'h, kediñ hinienned en alvez zo hepken un tun darnodour (Hans JONAS a ziskouez ervat an tun a zo kediñ hinienned d'an atom). Ur goubarañ all eo desachañ an alvez ivez etre ar c'hrommelloù ha lakaat un eilpennadur da c'hoarvezout ; endra zedalvezer diskiblezhioù jedoniel da studiañ an alvez a zo *aze endeo*, e kendod ar Jedoniezh he reizhiadoù *dezhi he unan* diwar amprestoù diouzh an alvezoniezh pe diouzh an hanvout : e se, an egorioù jedoniel o deus da welout gant an egor alvezel war-bouez an diforc'h ez int *peurzespizet a-gentouez* tra ma'z eo an egor alvezel *arlakaet a-zianouez* ; e se, an ergorennoù jedoniel a denn d'an hinienned kedet er bed loue war-bouez an diforc'h ez eo ar c'hediñ o savelañ o hinienned un darbenn peurzespizet.

Diwar se, lod eus an termennoù arveret er Jedoniezh zo ivez amprestoù diouzh lavar an alvezoniezh koulz ha diouzh lavar an hanvout. An diviz nemetañ eo ma vent peurzespizet ha gwarezet dre bennaenn ouzh goudizh o arverioù alvezoniel pe vuhezel. Eno emañ hon c'hudennoù gant *diforc'h, par*, h.a. A dra sur, an hent mat a gemeromp o paotaat an hanc'herieg war-benn parraat ouzh ar forc'hellegezhioù a stadomp er yezhoù all ha, dre ma ne c'hellomp ket atav peuretrekrommellañ ar re-mañ en hon dierouez, en hon hini. Diwar vont, n'eo ket peogwir ne gav ar c'hallegerion pe an alamanegerion diaester ebet oc'h arverañ termennoù dispis (dre benn moarvat ma tezevont e jedonieg ha nad eo ar yezhoù nemet eilaraezioù evito), hor be ni da sevel un hanc'herieg jedoniel dispis d'hon tro !

Evit distreiñ da graf "an ergorenn *par* dezhi he unan", e kavan diaes ober aze gant *par*. Gwelout a rafen kentoc'h un amprest diouzh hanc'herieg an hinienned, ennañ ar gedrann *-un-*. Ha Br. *an-un* pe gentoc'h *anun* ne c'hallfe ket dereout (kv. KIS-540, La-11, pp. 226-227) ? Er pennad-se ez eo kevatal *an-un* da *ipse* aa., tennet diouto a-getep *anunded* hag *ipseitas* pa. Merzhout a ran e lavarez da unan : "un ergorenn zo *par* dezhi he unan, *an un* ergorenn eo". Alese e lugnfen ar stagell *anun gant* : "an ergorenn zo *anun ganti* he unan". Dre zespizadur e ve lakaet etre krommelloù kement keal o tennañ d'an hiniennoù loue evel just. Evit ar c'heal kontrol e c'hallfed amprestañ c'hoazh diouzh hanc'herieg an hiniennoù loue hag ober gant *all* pe, dre zamant d'ar fraezhded sonel (ha sterel ivez), *arall* : "Div ergorenn zo *arall* dre dermenadur." Ar stagell a ve *arall da*. Soñjet 'm boa en *amgen* (arveret c'hoazh e KIS-501, La-10, p. 405, met hag an un ster a roes dezhañ ?) ; en *estr* (met diaes e arverañ hep *eget d'e heul*) ; e *kevall* ("all kenetrezo"), met ha ne ve ket ponneraat ? ouzhpenn

se ez eus ur *kevall* all endeo. Aze ivez e rankfed despizañ : “Lakaomp ur bempac'h (*a, a, b, b, a*). Lavarout a ran ez eo amparet gant div elfenn *arall a* ha *b...*”. *Arall* despizet evel “nann anun”. Mar 'm eus komprenet, *a* anun ganti he unan zo trireveziat amañ ; *b* anun ganti he unan, arall da *a*, zo daoureveziat.

Ur poent eus da destenn n'on ket deuet a-benn da intent fraezh : ne roez ket despizadur Gl. *discernable, indiscernable* ; pe ziforc'h etrezo hag an termenou all, eleze *distinct, différent*, h.a. ? Hag emeur eno en un dremmwel all : bezet teir elfenn beurheñvel (unrezh), e lavarer ez int *digemmadus* (dre an ibiliañ da skouer) — an termenou *digemmadus–andigemmadus* o talvoud hepken evit an elfennoù arall unrezh ha n'eo ket evit reveziadennoù un elfenn anun ? Sklerijenn, mar plij !

A-du-rall, evel a'c'h eus displeget din, Gl. *univers* er c'herienn *univers des possibles* n'eo ket an hini a gaver er c'herienn all *univers du discours* “hollad ar rummoù kemezel angorzhet gant un erganad” : “« Ki ebet ne gomz » zo gwir en *Udd* ar Viloniezh, nann e hini ar Vojenn” (skouer roet gant Lalande). En degouezh-mañ e'm eus graet, n'ouzon mui pelec'h, gant *bed ar prezeg*, a gavan skort. Daou zorc'hadur yezhourel a welan : deverañ pe diwar *kevan-* : *kevanved, kevangor, kevangant*, pe diwar *han-* : *hanved* (eleze : bed dibarek savelet *ad hoc* ; arguzenn a-du gant dibab *han-* : bezañs *hanc'herieg* “hollad ar gerioù angorzhet gant un diskiblezh, h.a.”), nemet ez afed diouzh un durc'hadur etre : *hangor, hangant...*

(YBAN da GE — 25 05 98)

Argraf ar Gl. *égalité, identité*, Al. *Gleichheit* zo unan a bouez a gaver diouzhtu e diazez ar studiennou Jedoniezh. En e levr *Philosophie der Arithmetik* e pled HUSSERL gant ar meizadoù *Vielheit, Einheit, Anzahl, Zahl* e-ser dezvarn labourioù jedoniourion evel FREGE e-touez tud all. Dav lavarout n'on ket kendrec'het gant pezh a skriv. E diouer ar skrid orin n'on ket c'hoazh evit reiñ arroudoù eus e oberenn, nemet eo anat ez enebe hon Privatdozent der Philosophie ouzh an Aksiomatik ha ne c'halle nemet kareziñ FREGE. N'eo ket souezh enta e tisoc'hfe gant ur meni bredelouriezh, daoust dezhañ embann un enepbredelouriezh e derou e labour. Marteze e vo donaet an dra-se diwezhatoc'h, mar kavan an dro.

Ha bremañ e fell din adkemer pep tra ha displegañ ar perag eus an dibab a zo bet graet eus Br. *par*, Br. *arun*. Gwell e kavan na zegas kevatalioù gallek pe alamanek evit c'hoazh, rak trellus ez int muioc'h eget traoù all.

1° Br. **par** zo un termen gwriennet mat er yezh, abaoe keid-all ma ne welan abeg ebet d'e zistroadañ. Ne vije ket bet fur. A zo gwell : diazezoù a gavan er yezh evit ategañ seurt dibab. Ha kement-se eo a fell din gwelout bremañ.

2° An arouez [≡] zo hini un termen kentañ eus ar Jedoniezh, da lavarout eo e kemer ster e-ser hollad an termenoù kentañ all. A se ne c'haller ket didermenañ [≡] hep ober dave d'an termenoù all. Pa lavarar “despizadur” er Jedoniezh ez eo kentoc'h e ster un ensavadur, ur saveladur. Ar Jedoniour a zod kentreadoù, en o zouez “ergorennoù”, reolennoù, hag all. Da zaveiñ a ran d'ar pezh hon eus skrivet endeo a-zivout ar reizhiadoù darbenn-dezren. Pa zoder un ergorenn ez eo en he hinienned hag he anunded, eleze e chom an un er reizhiad jedoniel evit kement jedoniour 'zo. N'eus argraf prederouriezhel ebet war gement-se, un ensavadur, un diferadur eo. Setu perak e krog alies ar poelladennoù pe ar pleustradennoù Jedoniezh dre an termen : **bezet**. Reiñ a reer boud, hinienned hag anuned d'an ergorenn dre ziferadur. Mar despizan un tric'horn er blaenenn daveet d'un dealf reizhreolel da skouer :

Bezet an tric'horn savelet dre ar poentoù A(1,1), B(2, 3) ha C(5, 2)...

e chomo an tric'horn-se an un tric'horn evit ur Jedoniour eus ar bloavezh 2182 staliet e Kalifornia. Seurt *anuned* zo unan ensavet adalek ar penn-kentañ, un ensavadur jedoniour, e sol ar Jedoniezh. Ur wech diferet, despizet an ergorenn, ne vo ket mui anv eus he anuned. Aplud ar Jedoniezh eo, an nor eo hag ur wech aet tre e serrer an nor, emeur e-barzh ar reizhiad.

Marteze ez eo diazezet war an hinienned hag an anuned kedet d'an traoù eus ar bed, plant, tud, loened, ha me oar-me... E degouezh an Alvezoniezh e c'haller sevel goulennnoù, ematersiñ, ha bezañ prederour. Er Jedoniezh ez ensaver, e toder, e saver un delvan puraet. Dizave eo an anuned, kloz eo an ergorenn jedoniel warni he unan en ur ser gant an termenoù kentañ. Ne gogo an daveadurioù nemet a eil lank, pa vint ensavet etre an ergorennoù en o anuned ketep. N'ouzon ket penaos lavarout kement-se e galleg, en alamaneg naket. Ha n'on ket prederour. Ne ve ket fall dit lakaat da fri en argraf ha gwelout ha dalc'h zo er pezh a haeran. Ur skouer :

Bezet tric'hornioù eus ar blaenenn $\Omega = \{T_1, T_2, T_3\}$, despizet dre zaveennoù o begoù. Bremañ e c'haller savelañ daveadurioù kenetrezo, eleze etre o anuned ketep.

Da savelañ un daveadur ez ereer *daou* dric'horn, ha neuze e vo savelet mat un daveadur mar roer e c'hraf, eleze ur parzh eus Ω^2 .

| | T_1 | T_2 | T_3 |
|-------|--------------|--------------|--------------|
| T_1 | (T_1, T_1) | (T_2, T_1) | (T_3, T_1) |
| T_2 | (T_1, T_2) | (T_2, T_2) | (T_3, T_2) |
| T_3 | (T_1, T_3) | (T_2, T_3) | (T_3, T_3) |

Bezetañ an daveadur \mathcal{R} savelet dre e c'hraf : $R = \{(T_1, T_1), (T_2, T_2), (T_3, T_3)\}$. Talvezout a ra ez eo gwir an erganadoù-mañ :

$$T_1 \mathcal{R} T_1, T_2 \mathcal{R} T_2, T_3 \mathcal{R} T_3.$$

Stadañ a reer ez eo ereet pep tric'horn outañ e-unan. Notañ a reer boas :

$$T_1 = T_1, T_2 = T_2, T_3 = T_3.$$

Lennet e vez : T_1 *par* da T_1 , hag all. Pezh hon eus graet eo sevel un daveadur daouadek, anvet *parder*, a zo un daveadur kevatalder arbennik, pa'z eo asplegat, kemparzhhek ha trazeat evel an daveadurioù kevatalder all, hogen a zo ivez gourzhkemparzhhek ($T_i \mathcal{R} T_j$ ha $T_j \mathcal{R} T_i$, neuze $T_i = T_j$). Pezh a laz eo ez engwerc'her *div* elfenn. E se, pa vez kel a zaveadur e lakaer par ouzh par div ergorenn. Parder etre div elfenn eo, na pa ve engwerc'het an un ergorenn. Un degouezh bevennat eo, an dereoù kevatalder o vezañ amparet gant un ergorenn hepken. An kez ergorenn zo dezhi lies staelad enta : i) evel ergorenn ensavet en he anunded ; ii) evel dere kevatalder, ennañ un elfenn hepken (un undañv) ; iii) evel derc'haller eus an dere. Kounañ ivez ez eo elfennoù \mathcal{Q} daouac'hoù, pep kedrann eus un daouac'h dezho pep a staelad.

Ha dont a ran d'ar Br. **p** ha d'an termenoù nes. N'eus ket ezhomm da forzhañ an hengoun yezhel : pa geñverier div ergorenn e lavarer : Br. *parañ*, *lakaat par ouzh par*, Gl. *comparer*, *égaler* (GERI.Ern.). Sellout ivez an hBr. *comperet* "comparatif", Iw. *comparit*. Ha Kb. *cymar*, *cymharu*, *cymhariad* "comparaison" ("ce dernier mot a une terminaison en *-iad* d'origine brittonique et ne vient pas directement de « comparatius », DGVB. p. 116), Kb. *pâr*, Br. *par* ha troiennoù evel Br. *e par* (*autant, aussi bien que*). A zo gwell, VALL. p. 243 a resisa : "EGALER s'— en qualité *para* [...], *dont par da*, *beza par da* " hag ivez : "en quantité, longueur [...] *kementa*, -

ti, ingala ”. Da geñveriañ gant an alamaneg *gleich, Gleichheit* ha *vergleichen*. Splann eo e ra dave Br. **p** da gentañ penn d'an doareadelezh. Evit e arver kementadel a gav din zo ur stlezhvadur diouzh Gl. *égal*. Evel just ez eo gwriennet mat er yezh a-benn bremañ. Neoazh ez eus bet kavet mat — ganit ma ne fazian ket — degas an termenou *amgement, hegement* e domani ar gementadelezh, pezh a ya tre diouzh durc'hadur ster ar yezh.

Ur skouer all :

Bezot R teskad ar gwerc'helion ha $x \in \mathbb{R}$. Neuze e kentreat x gwerc'hel roet (π da skouer) en e anunded.

Mar skrivan bremañ ar bomm : $3x \times x - 2x + 5$, pep reveziadenn x zo dezhi ur staelad a-ziforc'h er jedadur. Anster e ve lavarout ez int anun. Pezh a c'haller lavarout eo : pep reveziadenn a ra dave d'an ergorenn kentreet en he anunded, ha neuze ez eo pep reveziadenn arouez an x kentreet. Se eo hon eus gwelet amañ diaraok : $x = x$ a ensav un dere kevatalder dezhañ da zerc'haller an elfenn x he-unan. E gerioù all ez eo x arouez anezhi he-unan. Pa ensaver un ergorenn x en he anunded e saveler war un dro

| | | |
|---|------|------------|
| un | dere | kevatalder |
| { | | |
| x | | |
| }, ha dre se e c'haller he derc'hallañ drezi he unan. | | |

Ha se eo a reer ivez e-maez Jedoniezh, pa lavaran da skouer “**an** (va) avalenn e-kreiz al liorz” ? Mechal ha n'eo ket jedoniekat hon sell adalek ar pennderou, pa zodomp un ergorenn “an”, “va” pe “un” avalenn ? Gout a ouzon n'eo morse an hevelep hini ha padal en he ensavan en he anunded derc'hel, un anunded a rizh jedoniour a lavarfen. Setu perak e lavaren dit er pellgomz an deiz all e oa diaes dispartiañ ar sell ordinal diouzh ar sell jedoniour. Krediñ a rafen a-walc'h zoken ez eo hemañ a sour, kevaraezus dimp da wezhiañ war an ergorenoù da heul. A-benn ar fin e teufe ivez an ergorenn da vezañ arouez anezhi he-unan : “an” avalenn a welan c'hoazh bremañ dre ar prenestr a **zavean** d'an hini a'm eus plantet en douar hag ensavet evel “va” avalenn. **Par** eo dezhi *modulo* an daveadur a gevatalder, eleze par eo dezhi modulo un ambredañ a rizh jedoniour. Bewech ma welan “an” avalenn ez engwerc'han an daveadur a barder etre reveziadennoù ketep an kez ergorenn. Ha liz da Brassens :

*Mais bon sang, qui donc lui a dit
Qu'y a pas de chêne en Paradis (bis) ?*

Sellout ivez orin an arouez “=” : “Ober a rin gant ur re gensturiennoù, pe div linenn c'hevell keit-ha-keit, rak netra n'eo paroc'h eget daou c'hevell” (Robert RECORDE, ~1510-1558).

(GE da YBAN – 28 05 98)

Va degas a rez d'ober meiz war un arvez eus ar Jedoniezh na oa ket sklaer din. Ne ouien gwelout e meizadoù ar Jedoniezh nemet goubaradoù a vired warno an un despizadur hag a-raok ar goubarañ, a c'houlezed ganto staelad ul louet direct, digorfet — p'o deus e gwir ur staelad piaouel, savelet hep dave ken d'al louet. Stadadenn n'hon ezdalc'h ket a sevel un aters nad eo mui jedoniell, met prederel evit da jedoniourion 'zo bezañ bet deuriet gantañ. An kez aters a gaver savet endeo ganit pa skrivez :

“Ar Jedoniezh a bled gant ergorennoù derc'hel (Gl. *objets idéaux*), gant **derc'heladoù** (Gl. *idéalités*). [...] Tu zo bepred da vreutaat diwar-benn orin an derc'heladoù-se : hag e teuont eus an ergorennoù gwerc'hel dre zerc'heladur, dre c'houbaradur [...], pe hag ez eus anezho ul louerelezh dizalc'h diouzh an devezout, evel an alvez, hogen a rizh disheñvel, ha da heul e vent kantouezadoù evel ar re all ?” (KIS-501, La-10, p. 393).

En arroud-se e roes d'an aters ur furm blatonek : ha d'ar werc'helezh louet ez eus ur patrom derc'hel, un *ΔIdeva*, ar Jedoniezh o vezañ an hent da ziraet bed an Derc'hoù, an Ideennoù, ar c'helc'h jedoniell da skouer o vezañ an Derc'h peurbadel a c'hell an devezout diraez en tu-hont d'ar stummoù kelc'hiek stadet er bed ? Kenkoulz all e rojed d'an aters ur furm gantek hep kemman kalz tra, hepken dre erlec'hiañ ouzh an *ΔIdeva* an *transzendentaler Idee*, ouzh an “neñv meizel” ar “poell pur”, an eil hag egile o vezañ, n'eo ket goubaradoù a-zianouez, met gwirionezioù a-gentouez :

“Ich verstehe unter *Idee* einen notwendigen Vernunftbegriff, dem kein kongruirender Gegenstand in den Sinnen gegeben werden kann” (*Kritik der reinen Vernunft*, Transzend. Dial., I, § 2). [“Derc'h a ran eus un ergraf retvezek eus ar poell na c'hell ergorenn gevazas ebet bezañ roet dezhañ dre an haeziñ”.]

Anavezomp ez eo a-vec'h boulc'het argraf geneliezh ar Jedoniezh. Unan a dri : pe ez eo houmañ un deverad eeun eus ar c'hantouezañ, ur goubarañ, un distrihañ, ur stilekaat eus ar bed kantouezel ; pe, en eneb, ez eo hi dinaouad un urzh trehontel, ar goubarañ o c'hoari roll un trelusker ezvevennet er fin ; pe, hent etre, e tisoc'h ar Jedoniezh eus un daelerezh etre ergrafañ pur ha kantouezañ, etre derc'h trehontel ha

gwerc'h bedel. Dav e vo ergerzhout savlec'hiadoù prederourion all a-dal d'an argraf. Ur mennoz mat eo da hini stagañ gant *Philosophie der Arithmetik* : dre an oberenn-se eus derou e remzad edo HUSSERL oc'h emzieubiñ diouzh jedoniegezh DESCARTES ; aon 'm eus avat edo endeo, dre zegemer keal kantek an *transzendentales Ich*, o skeiñ etrezek e zerc'helouriezh dezhañ.

Kement-se ne vir ket a arverañ er Jedoniezh an un termenou hag er gedvuhez. An *anunded* dres a lavarez o deus ar jedoniourion he savelet ur wech da vat, ne zistroont mui warni, ne reont mui argraf na kudenn ganti, e berr ez eo rez d'o reiz. Ouzh kemm, er gedvuhez en deus an termen ur steriegezh puilh hag arlivek ha, dreist-holl, evit e zespizañ ne rekouer ket d'un disentez krennus, d'un darbenn, met d'ar buhezañ. Padal, er pemdez e chom empleg ivez keal an *anunded* : Paol zo an un den hiziv ha dec'h, amoet e ve distreiñ war se ken rez eo d'ar reiz. Un den koulskoude a zistro war se, a zo an *anunded* kraf d'e reiz, eo ar prederour. Evitañ, an *anunded* n'eo ket amkan un darbenn met, mard eo anadennoù dreist-holl, amkan ur c'hrediñ : n'eus prouenn ebet ez on an un den en amzer, prouenn ebet eus va *zreiinded*, ur c'hrediñ n'eo ken — ur c'hrediñ boniek, un *Urdoxa*, un *Urglaube* hervez termenou HUSSERL — dodad na gloz ket an argraf, en eneb, a brient distroioù diziwezh warnañ ; unan eus an distroioù-se a zisoc'h gant an dodad en o devez an traoù d'o zro o *anunded* dre ur c'hrediñ diganimp, un astenn dezho eus ar c'hrediñ en hon hini.

A se e tiskouezer n'eo ket an *anunded* jedoniel disoc'h ur goubarañ, hogen eus ur c'hrediñ piaouel ; dizalc'h emañ he dodañ diouzh dodañ an *anunded* vedel, rak ned eo ket lamet dre an *epochv* : lakaat ar bed “etre krommelloù” ne freuz ket galloud ar me da gediñ a-zistag *anunded* ken da ergorennoù ar bed gwerc'hel, ken da ergorennoù derc'hel, en o zouez an ergorennoù jedoniel. *Anunded* an ergorennoù jedoniel ne zinaou ket enta eus *anunded* an ergorennoù gwerc'hel : n'eus ket etrezo un treug eeun a louer da c'houbar, hogen dezho pep a dreug adalek ar me. Forc'hellek eo lavarout ez amprest ar Jedoniezh termenou diouzh ar gedvuhez ; kenkouls all ez amprest ar gedvuhez termenou diouzh ar Jedoniezh. Dirak da avalenn e verkez ez eo “diaes dispartiañ ar sell ordinal diouzh ar sell jedoniour”. E gwir, *anunded* an avalenn hag *anunded* an tric'horn n'emaint ket e kevezerezh da c'houzout pehini zo deveret diouzh eben ; kevelerezh a vez kentoc'h etrezo, pep hini o teurel sklerijenn war eben ; n'eus brilec'h gant hini : an eil hag eben zo disoc'h pep a gediñ.

Pa'z eus anv eus ar *parder*, e kavomp eno ur skouer splann eus ar sklerijenn-se taolet gant ar Jedoniezh war ar gedvuhez. Merkañ a rez ez eo ar *parder* er gedvuhez amkan ur priziañ — gwezhiañ dangorek mar bez ; hogen er gedvuhez end-eeun, *hag evit ezhommoù ar gedvuhez*, e strivad da dennañ ar priziañ er-maez eus kant an

dangorelezh war-benn keñveriañ doareadoù ha dreist-holl kementadoù. Diwar an derou edo o kevelañ “sell ordinal” ha “sell jedoniour”. Ur striv all d'o diveskañ a zisoc'has, diouzh un tu en Arz, diouzh an tu all er Jedoniezh. Kloz eo, emezout, an ergoren jedoniell warni he unan en ur ser gant an termenoù kentañ.” Erganad hemañ a denn e gantreizh eus orin anuneded an ergorennoù jedoniell en ur c'hediñ piaouel dizalc'h. Mar komzer eus *goubarañ jedoniell*, n'eo ket e ster un *eztennañ* anienoù pur diouzh ar bed gwerc'hel, met e ster un *dispartiañ* etre disoc'hoù daou gediñ, etre an ergorennoù kedet o anuneded en derc'helezh hag an ergorennoù kedet o anuneded er werc'helezh.

Mar c'hoarvez kerzh ar jedoniour a savelañ un hollad kloz ha kevanlen a dermenoù kentañ hag a loc'hañ diwarnañ hep e lakaat en argraf ken, ez eo kerzh ar prederour en eneb distreiñ diziwezh war an “termenoù kentañ” hag o adlakaat en argraf. Pa gomzomp anezhi, menegomp e voe an *anuneded* end-eeun preder buhez HEIDEGGER. Daveiñ ne rin ken d'e levr *Identität und Differenz* dre venegiñ linennoù diwezhañ ar Raklavar : “Penaos e tinaou an *Differenz* eus anien an *Identität* ? Al lenner en dizoloy e unan, mar selaou ar c'henson a ren etre an *Ereignis* hag an *Austrag*. En domani-mañ, na c'haller ennañ dienaar netra, e c'hell meur a dra bezañ diskouezet.”¹ An termennoù diazez 'm eus lezet en alamaneg, rak ne c'haller o meizañ nemet dre heuliañ treug o ster e diabarzh hanc'herieg ar prederour e unan.

Al. *Ereignis* er yezh voutin a dalvez kement ha "darvoud, c'hoarvoud" ; hogen HEIDEGGER, o sevel a-rekin d'an deveradur, a zegouezh gant Al. *eigen* "piaouel, er gerz an unan", Al. *sich eignen* "dereout, bezañ barrek, gougonek", a wisk war an termen ur c'hemeradur o tennañ da "piaou kevret, kerz voutin, kenetredereout" — André PREAU a ro ar c'hevatal Gl. *copropriation*.

Heñvel dra, Al. *Austrag*, a zo war ar pemdez kevatal da "diskoulm, kas da benn", zo intentet dre zaveiñ da La. *differo* (< *dis-fero*) "kas er-maez, hebiou" gant ur c'hemeradur kemplezh "bezañ diforc'h en ur chom tal ouzh tal" — dec'heriet gant PREAU dre Gl. *conciliation*.

Evit Al. *Differenz*, n'eus bomm sklaeriusoc'h war breder HEIDEGGER eget an arroud-mañ eus e skrid all *Der europäische Nihilismus* : “An *Unterschied* (Gl. *différence*) a arouezer gwell dre an termen *Differenz*, a weler bennozh dezhañ ez eo ar beziad hag ar Boud en un doare dispartiet, disrannet (kv. La. *dis-jungo*) ha koulskoude daveet (kv. La. *re-fero*) an eil d'egile drezo o unan ha n'eo ket dre berzh ur

¹ Günther Neske, Pfullingen, 1957 ; tr. gl. André PREAU : “Identité et différence” in *Questions I*, Gallimard, 1968, p. 256.

« gwezhiañ » o diforc'hfe. *Unterscheidung* (Gl. *différence*) e kement ha *Differenz* a dalvez ez eus *Austrag* etre Boud ha beziad” (p. 185).

Ar skalfad termenoù alamanek-se zo ur standilhon hepken eus alamaneg HEIDEGGER. Reher e vije klask adal bremañ reiñ dezho war an taol kevatalioù brezhonek. En o sigur evelkent e c'hellomp ober div evezhiadenn hollek :

~ ar spletus, ma n'eo ket an diziouerus, eo prederouriañ e lies yezh, an eil yezh o tont war skoazell an devezour pa chom skort al loazioù hegerz en eben ;

~ an hent digent d'ar preder eo nep yezh diwar ma teu prederourion da holc'hiñ a-zevri drezi — hag an hent dreist e c'hell bezañ er c'heñver-se ur yezh war ziorren (d'ar verb-mañ e roan e ster leun evel just). Emaomp o paouez merzhout aked an droerion c'hallek evit kavout en o yezh kevatalioù da hanc'herioù HEIDEGGER ; o strivoù zo ur gwir labour krouiñ o talvoud n'eo ket evit ar c'hallegerion hepken met evit prederourion an holl yezhoù, an alamaneg en o zouez, hag o teurel sklerijenn n'eo ket war breder HEIDEGGER hepken, met war dalbenn a-bezh ar Brederouriezh.

Uheloc'h e komzen eus ar sklerijenn a daol an eil war eben Jedoniezh ha kedvuhez. Heñvel stadadenn a c'haller ober a-zivout Jedoniezh ha Prederouriezh. An eskemmoù puilh a zo bet etrezout ha me abaoe pevar bloaz a-zivout *Identität* ha *Differenz* end-eeun o deus graet d'hon yezhañ ha d'hon devezout araokaat ha paotaat e pep hini eus an div ziskiblezh. Moarvat ne vijemp ket er poent deznaderezh hon eus diraezet mar hor bize labouret e galleg pe en alamaneg hepken : o kaout an daou-mañ da yezhoù kein, e piaouomp stabilded ar skor start ez int ha war un dro ar frankiz a zo hini ur yezh tal yaouank e barr he strujusted.

(GE – 21 03 99)

E gwir, n'eo ket paouezet ar prederiañ war an dodennoù-se. En ur studienn all a-zivout HEIDEGGER e'm eus kredet kinnig ar c'hevatal Br. *kevarallded* da Al. *Differenz*, o tec'heriañ “an doare dispartiet, disrannet ha koulskoude daveet an eil d'egile...”¹.

¹ Sl. KIS-587 – An dra hag an den e preder Heidegger, 21 06 98, pp. 146 hh. ha p. 156, n. 1 pergen.